

4. 5. 6.

n° 2.

CANTIC SPIRITUEL
EN HENOR DA SANT NEVENTER.

Var ton Guerz Lochrist-an-Izelvet.

MAR plich gant ar gompagnunez
 E selaouimp cana ar Vuez
 Eus an aotrou Sant Neventer,
 Patron patez Guineventer.

Sant Derrien ha Sant Neventer ;
 Pere a voa daou gavalier
 A noblang vras ha pinvidic ;
 Eus a Vro - Saoz voant gunidic.

Gant Doue e voent inspiret
 Da zilezel ho bro abret,
 Da vont da vizita ar plaçou
 Ma voe tourmantet an Aotrou.

E Jerusalem pa errujont ,
 Santez Helena a guefjont ,
 A voa eat d'ar c'hartier - ze ;
 Da glasq ar Groas a Vap Doue.
 Credi a eller gant ræzon ,

202888

2

O devoe an devotion
Da zicour , gant eur sourci vras ,
Ar Santez - ma da glasq ar Groas.

Rac-se e veler a bep amzer
Fecherru Gouel Sant Neventer
Dap deiz ma voe casset ar groas ;
Qemense zo testeni vras.

Goude ma o d'oa contantet
O dessin mad ha beniguet ,
E retornjont e Breiz - izel ,
E leac'h ma voa tud infidel.

Disqen a rejont e Guenet ,
Ac'hano e chejont d'an Naonet
E pelerinach var droad caer ,
Da vizita ilis Sant Per.

Grêt gante o devotion ,
Recevet ar gommunion ,
E tistrojont etreze Brest ,
E lech ma voa rentet o lestr.

En eur vont var eur rivier don ,
E veljont eur prinç gant eston
Och en em strinqa er rivier
Divar muraillou e vaner.

Pa veljont ar prinç en danger ;
E treusjont buan ar rivier ;
Dre m'oa Doue och o zicour ,

3

En tensjont prest demeus an dour.

Pa voe rentet en e vaner,
E c'houennas Sant Neventer
Pe seurt sujet en devoa bet
Eus en dizesper qer presset.

Allas ! tud gentil , emezâ ,
Un dragon zo er c'harter-mâ ,
Ha pa vez presset gant an naon ,
A ra ravach bras er c'hanton.

N'eus na tud nac anevalet
Na zevor oll pa vez naonec :
Qen terrupl ê , ne zeus netra
A alfe rezista ountâ.

Evit ampech ar malheur - ze ,
En deus ordrenet ar roue
Ma vije tennet bep sadoin
D'ar sort vardro cartier Elorn.

Ar sort zo qellies coezet ,
Ebars em zi , ne zeus chomet
Eus a guement den a meus bet ,
Nemet va mab ha va fried.

O velet e ranqen rei
Va mab dezân da zevori ,
Qer bras ê bet va dizesper ;
Moun en em strinquet er rivier.

An daou sant-mâ , ouch e glêvet ;

4

Er c'honsolas ; o lavaret ?
Na vezit eta qen payen ,
Ha ni o lamo a anqen.

Iezen Jesus-Christ ambrassit ,
Ha ni e rai , dre e verit ,
Ma ranqo an dragon sortial ,
Ha ne rai mui drouc da netra.

Constantin en deus , emezo ,
Anavezet an danger zo
Och heuill iezen ar bayanet ,
Hac en deus deze renoncet.

Mar quiit ober evel se ,
Ni bromet deoc'h , abers Doue ,
Ne zeus na dragon na serpent
Na drec'hot tout facilamant.

Ar prinç-ma a voa qen dallet ,
Ne rê man evit o c'hlêvet :
Contant ê da goll e anqen ,
Mes nonpas da chench a lezen .

Ha mar chasseit ar serpent
Eus va douar , o po ho c'hoant ;
Mes evit quitât va iezen ,
Biqen an dra-ze ne raen .

Sant Derrien , gant eun douçder vrás ,
D'ar prinç Elorn a lavaras :
Non eus qet affer ho madou ,

5

Guell ê ganeomp caout ilizou.

Grit eun ilis , pa na rac'h qen ;
E leac'h ma c'hallo ar gristenien
Exerci o religion ,
Ha ni chasseo an dragon.

Ofr a reas gant honestis
Da lacât ober eun ilis
Efaveur eus ar gristenien ;
Hac e vab da veza christen.

Oc'hpen e roas da dud e di
Permission da zistrei
Och al lezen eus a Zoue ;
O rei dezo peb liberte.

Sant Derrien ha Sant Neventer
A'voe carguet a laouënder ,
O velet cavet ar voyen
D'ober eun templ d'ar gristenien.

An daou Sant-mâ incontinant
Ayas da gavarn ar serpent ;
Ha dre eur feiz vrás o devoa ,
E rejont dezàn sortial.

Un nombr infinit eus a dud
Eat da velet ar burzud ,
A'voe darbet dezo mervel ,
O velet eur monsù quer cruel.

Boza en devoa çus a ed ,

6

Ervez an histor, pemp goured ;
E gorf a voa, da viana,
Qement hac eur march' ar brassa.

Och eur bazilic voa evel,
Hac eur zell dezàn qer cruel,
Ma laze an dud hep tarda,
O sellet outo hep qen tra.

E gorf a voa oll goloet
Eus a scant calet bras meurbet :
En eur guir, qen terrapl e voa,
An oll dud a grene razàn.

{ **N**e voa nemet an daou Sant-màn
A voa assuret dirazàn :
Derrien, gaot eur feiz ha joa vras ;
Divar e varc'h a zisqennas.

E varc'h furius o velet
An dragon cruel so:tiet,
A dec'has dre ar c'hartier pell :
Ep e alle den e zerc'hel.

Dre sin ar groas, ep caout aon ;
Derrien avanç var an dragon,
Pehini en em lès gantàn
Dober a gar eus anezàn.

Lavaret mat d'oa Doue,
Piou benac en anavezie
A chasseje ar serpentet,

7

Dre e c'hallooud, hep drouc ebet.

Eur gouris satin zo gantâ,
Var dro e c'houzouc er iaqa ;
E rei a ra da gundai
Da vab ar prinç bete e di.

Ha den en deus clêvet biscoas
E vije eur c'hrouadur nao bloas
Capapl da zerc'hel hep aon ,
Var boues eur gouris eun dragon ?

N'oa qet bian ar joaüstet
En devoe Elorn o velet
E vab o terc'hel ar serpent,
Diaguent bet quer violent.

Gant cals eus a civilite,
E trugareqeas neuze
Sant Neventer ha sant Derrien ;
Evel e vad-oberourien.

D'ar gær a Vrest o c'hunduas ,
Gant respect ha gant henor bras ,
Da gaout ar roue o c'hassas ,
O recevas gant eur joa vras.

Ar roue Bristhoc a estonas ,
O velet eur miracl quer bras ;
Rac e qement a ma zeant ,
E voant heuliet gant ar serpent.

O veza ganto kær guelet ,

8

Ha cals a henor recevet ;
Ec'hejont da laret adie
Dar prinç Elorn ha d'ar roue.

Ac'hano e sortijont prest ,
Da vont ermeas demeus a Vrest ,
Evit monet da Bontusval ,
Eno e veuzjont an aneval.

Ar plac-se zo en eur bares ,
Hanvet bremâ Plouneour-tres ,
En dicces eus a Leon :
Chetu aze fin an dragon.

Ac'hann e c'hambajqjont o daou ,
Goude nombr bras a viraclou ,
Da vont adarre en o bro ;
Oblijet bras e zomp dezo.

Qement den a zo er c'charter
Zo oblijet da sant Neventer
Da veza delivret ar c'hanton
Eus a grueldet an dragon.

Guiniventeris dreist pep re ,
Adle bemdez pedi Doue
Caout da batron sant Neventer ,
En deveus qement a boñer.

Ar prinç Elorn a zo chommez
En idolatri obstinet ;
Evab Rioc hac e briet ,

9

Ha tud e di a zo chenchet.

Goude **ma voent cateqizet,**
Gant joa vrás e voent badezet ;
Vaqi a reant d'an oræzon
Gant cals eus a zevotion.

Solicita rent e peb guis
Ar princi da ober eun ilis,
En honor d'an daou abostol,
An aotrou sant Per ha sant Paol.

Ar plaç m'o devoa choazet
A voa hanvet neuze Barguet ;
Galvet brema dre ar c'halter,
Ilis paros Guineventer.

A la fin , dre gals a beden.
Ec'h accordas dezo o goulen,
Nemet na vije e barguet,
Er plaç-se ne bermetje qet.

Goulennet voe artizanet,
Ar materiou a voe rentet
En eur plaç a Barguet Istant,
Mes Doue ne voa qet contant.

Lavaret a rer communamant
E voe commancet ar vatimant
Dre eur gommandamant expres
E menez ar Run e Sant-Serves.

Pa voe commancet batissa

to

Er plaç-se ma falle deza,
Dre viracl e voe transportet
An oll materiou d'ar Varguet.

Ar prinç mechant-ma pa glêvas,
Efuror en em leqeas,
Erves custum idolatret,
Avez gant Doue abandonet.

Dre ar goler disesperet,
Oc'h e vab hac oc'h e briet,
O chasseas, gant ordrenanç
Na deujent mui en e brezanç.

An ilis, dre ar fæçon-ze,
Ne voe qet batisset neuze;
Rioc a guitas ti e dat,
Hac e yas gant e vam er c'hoat.

Da benn eun nebeut goude se
Evoe e Breis-izel eur roue
Hac a leqeas e batissa
Er plaç ma e galveur bremà.

Chetu aze a guer e guer,
Histor buez sant Neventer,
Ha sant Derrien, e gompagnon:
O pet dezo devotion.


Guineventeris, me fel din
Ezac'h bemde var ho taoulin
Da zaludi sant Neventer,

En deveus qement a bouvoer.

Da sant Derrien bezit devot,
Hac o pezo, guelet a reot,
Cals a zicour dre e voven
Da veva e guir gristenien.

An daou Sant-ma o presanto
Da Jesus en heur ho mato ;
Hac er passach dangerus-se,
E pedint evidoch Doue.

A M E N.



CANTIC

A R G A R N E L.

Var ton ar *Miserere mei e brezonnes,*

*

DEZOMP d'ar garnel, christenien, guelomp ar relegoù
Eus hor breudeur, c'hoarezet, hon tadou, hor mamou,
Demeus hon amezeyen, hor brassa mignonet,
Guelomp ar stat truczus e p'ini int rentet,

12



Guelet a reot anezo torret ha bruzunet;
Ha memes an darn-vuya a zo e poultr rentet;
Ne veler mui o noblanç, o danves, o guenet;
Ar maro hac an douar o deus o distrujet.



Ar paour hac ar pinvidic, ar mestr hac ar sujet;
Oll e zint rentet envel, oll int dissevelebet;
Ne deus mui nemet esqern, poultr ha breinadurez;
Dign eus a gompassion, hac eus a bep truez.



Oguen er stad truezus e p'ini int rentet,
E parlantont e langach mud eloquant meurbet;
Ous pebunan ac'hanomp mar qeromp profita,
Qeit a ma plijo gant Doue or lezel er bed-ma.



Clevit eta anezo, ha grit attantion
E dezir da brofita eus a greis ho calon :
Lavaret a rint deoc'h e zint bet er bed-ma;
Hac e varfot evelto pa sonchot nebeuta.



Ni zo bet var au douar o ren qercouls a t'fui,

18

O parlant hac o vale, o c'hefa, o tibri,
Ha chetu ama brema ar stad ma zoump rentet,
Goude ma zoump bet en douar o vezur ar prenvet:



Me voa eun den cre a galant, ha me eun digentil;
Me voa eun den pinvidic, ha me eun den habil;
M'emeus collet ya noblanç, ha me va oll danvez;
Me va nerz ha ya guenet, ha me va guezieguez.



N'hon eus cavet er bed-ma nemet hon œuvrou-mad
Da brezanti d'hor Barner, d'hon Roue ha d'hon Tad :
List eta madou an douar, detestit ar viçou ,
Hac ornit mat oc'h ene a bep seurt vertuziou.



Mar goulennit diganeomp ma eo eat hon eneow ;
Ni resproto : d'ar purgator ; ennes eo hor bro.
Emaint en tan o têvi, evit peurbaea hor gle,
Contractet var an douar da justiç hon Doue.



Eus a guelet ar flamou , ne cessont o criail ;
O c'houlen o pedennou , ma c'hellint sortial
Eus ar prizoniou tenval e pere int taolet :

14

Astit, astit d'o zicour, ha na zaleit qet.

*

Dec'hu enem adressomp, qerent ha mignounet,
Da gaout memor ac'hanomp pa zeot dre ar veret;
Livirit en eur dremen : Doue ra bardouno
D'an anaoun er purgator, ennes eo or bro.

*

Eun aluzen, pe eur beden gret gant devotion ;
Eur yun, pe eun oferen, pe eur gomunion
A ell cals hor soulagi, ha diverra hor poaniou,
Hac hon tenna en eun instant a guelet ar flamou.

*

C'hui, beleyen charitabl, oc'h eus hor c'hunduet
En bent hor ailydiques, pa edomp var ar bed,
Cuntuuit c'hoas eun neubeut da gaout truez ouzomp,
Oc'h ober, dre drugarez, œuvrou-mad evidomp.

*

Espicial o pedomp, pa zeot da celebri
An oferen en ilis, clevit neuze hor c'hri,
Eus a guelet ar flamou, o c'houlen digueneoc'h
Ma teuot da ober gant Doue dre sacrific hor peoc'h.

15

*

Ha p'or bezo peur-baet ar boan dlet d'hor pec'het,
 Ni or bezo deoc'h neuze digant Doue reget:
 Pedit, ni a rai ive ; enem sicouromp oll,
 Ennes vezo ar voyen da zeï nicun da goll.

*

Evel an dour o vouga an tan goall elumet;
 An tan eus ar pnrgator a vez ive mouquet,
 Dre'ar sacrific santel offret var an auter,
 Da c'houlen hon delivranç digant Doue hor Zalver.

*

Pa zorti an eol sqedus a zindan ar goabren,
 Ar bed oll en eun instant a receo sclærigen ;
 Ni a zortio ive sclær evel ar steret,
 Eus ar boaniou a zoufromp dre'r sacrific offret.

*

Adieu, tadou ha mamou, breudeur ha c'hoarezet ;
 Adieu, qerent, mignonet; adieu deoc'h, tud ar bed :
 Ni a ra deoc'h brema hor c'himiad diveza :
 Adieu deoc'h, qen a vezo e traouyen Josaphat.

*

Roit ar repos éternel, va Jesus, va Autrou,

16

D'an oll eneou decedet, pere zo er flamou;
Ebars en ho parados, d'ho meuli da james,
Assambles gant an oll sent ha gant an oll æles;

F I N.



E MONTROULEZ, e ti LEDAN, e ru ar Vur.